

KANTIK

En enor d'ann itron varia Lourd-en-zent

AR PARDON BRAS ZO D'ANN EIL ZULA VIZ GOUÉRÉ

- 1 Er Zent, parrès Sant Samuël
Eur chapel gaër zo zavet,
En énor d'ar Verc'hez santel :
Ilrôn Varia Lourd hanvet,



Diskan : Ilron Varia Lourd-er-Zent,
Tollit varnoup ho pennoz ;
Dale'hit' c'hanomp bepred enn hent
Hor c'hasso d'ar barradoz.



- 2 E Kichen ar Vourc'h, en eur c'hoat,
En eun dachennik distro,
E z'eo evit ann daoulagad,
Ar c'haëra l,éac'h euz ar vro.

3 Decomp'oll, christenien, d'hé guélet
Gant feiz ha gant karantez :
Eno a vezimp sélaouet,
Gant Rouanez ann Elez,



4 Hi eo Merc'h ann Tad eternal
Mam hor Zalvér benniget
Ha Pried ar Spéred-Santel ;
Dreist ann oll Elez zaset.



5 Piou biskoaz enn dristidigez,
En devez bet hé fedet,
Hep beza dré he madelez
En em gavet konsolet ?



6 An nep a zeuio d'ho pedi
Ebarz ho chapel nevez.
Grit, mar kavo dré-z'oc'h, Mari,
Ar peoc'h, ar joa, ar vuez.

- 7 Mar d'omp trubillet, ankennet
Zavomp oll hon daoulagat,
E-trézé hor Mam benniget,
Ken dous, ken tener, ken mad.



- 8 Mar glask Satan, on enebour,
Hon toll d'ar pec'hed marvel,
Ni c'houlenno ganoc'h zikour.
Guerc'hez à Lourd, Mam Santel.



- 9 O Mam Jésus, leun a zouster,
En or poaniou, labourou,
Diskoeii bépred en hor c'héver,
Galloud bras ho pedennou.



- 10 Grit ma vezo dour ho feunteun
'Vit ann oll dud affliget,
A iéc'hed, a c'hras, eur vamen
'Vit ho dougen d'ho karet.

11 Ebarz ho chapel daoulinet,
Guerc'hez à Lourb o Mari,
Keuz on b'euz da veza pec'het,
Pedit ho Mab' vid'omp-ni.

12 Skuillet eta, Guer'hez Santel,
Ho kaëra donezonnou
Var ho servicherien fidel
Ho ped enn ho ezomou.

13 Rak bété hon heur diveza
Ni fell d'omp. o Mam Santel,
Ho karet hag ho servicha,
'Vid'oc'h beva ha mervel.

14 Pa renkimp kuitaat ann douar,
Pa vimp galvet gant Jesus.
Mari, grit ma welimp hé c'hloar
Enn hé varadoz euruz.

IMPRIMATUR

JÉGOUZO

Vikel bras